

Al lestr melen glas

Ur studier war al lennegezh a rank skrivañ, a gav din. Mod-all, penaos e c’hallo biken displegañ petra eo ar skriverezh ? Kenkoulz e vefe d’un den dall strivañ da zisklêriañ d’un arzour peseurt livioù e tle ober ganto. Mar fell dezhañ dont da vezañ ur c’helenner war al lennegezh e vo dav dezhañ skrivañ, ha setu. Bravoc’h eo lavarout eget ober. Perak e c’hoarvez atav ganin bezañ ken ginet ha ken reustlet a-raok kregiñ em fluenn ? Abalamour e talvez sevel ur skrid kement ha goveliañ armoù a vo distroet a-enep din, moarvat. Ha pa ne vefe diskouezet ar skrid da zen ebet, eno e chomo dirak va daoulagad, o lakaat war-wel an traoù kuzhetañ eus va c’halon, traoù da lakaat ac’hanon da vougañ gant ar vezh.

Ha war un dro, pelec’h e vo kavet an teñzorioù priziusañ ma n’eo ket e toulloù donañ an eñvor ? Hag amañ emañ adarre, o turiañ evel ur c’hozh goz. Ha pe vern din ma vez diskoachet mil gwech muioc’h a vein-bili eget a vein-sked ? Ar mein-bili a zo mein-arnod an aour hag an diamantoù. Hepto ne vefe ket tu da c’houzout ha mat pe fall e vez ar pezh a vez tennet diouzh mangleuzioù an diemouez ha dispaket a-wel d’an holl war doubier wenn-kann ar bajenn. Hepto e vefe aner d’an arzour poaniañ e ribouloù teñval an tremened. Kaer en deus turiañ, siwazh, ne gav nemet roudoù e c’hwitadennoù. Soñjal a ran en alioù fur va c’helenner kozh : « Gortozit, ha kompezet e vo pep tra. » Setu dres an dalc’h : n’eus netra da gompiezañ.

A-viskoazh ez on bet mezevellet gant kened ar plac’hed. N’em eus ket ankounac’haet dremm an hini gentañ. Pemp bloaz bennak e oan d’ar mare-se, ha chomet e oan bamet e-kreiz ar straed, oc’h arvestiñ

ouzh ar briñsez : merc'h ur roue 'oa anezhi, a dra sur. Meizet he doa daoulagad dispourbellet ar paotrig, ha mousc'hoarzhet he doa outañ. N'eo ket bemdez e vez kejet gant priñsezed. Peurvuiñ ne vez gwelet nemet o skeudennoù er c'helaouennoù pe war skramm ar pellwel ha ne vez klevet o mouezh nemet goude m'eo bet distreset gant ar skingomz. Forzh penaos, n'eo ket d'ur gelaouenn na d'ur benveg elektronek e vez lavaret komzoù a garantez. Ha koulskoude...

Div steredenn o deus treuzet va buhez, ken skedus ha ken dibad ha steredennoù-red. Pe oad e oan pa'm boa gwelet Rouanez ar Palmez evit ar wech kentañ ? Kentañ bloavezh ar skol-etre e oa evidon, hag eviti ar bloavezh diwezhañ, ha prest e oa da vont d'ar skol-veur. Staget he doa dija gant ar vicher a zlee degas dezhi brud, madoù, hag ar marv a-benn ar fin, ar gwad o tiverañ betek an dakenn diwezhañ diouzh he divarzorn skejet e dour he c'hibell (ur gibell ken ledan hag ul lenn-neuñ). Seitek vloaz e oa pa'm boa gwelet anezhi war leurenn-c'hoari ar skol. C'hwec'h vloaz c'hoazh he doa da vevañ. A-boan ma'm boa paket va fevarzek vloaz, ur mic'hieg, ha netra ken. Nag a c'hoapadennoù ma'm bije kredet disklêriañ dezhi trivliadennoù va faourkaezh ene. Ruziañ a ran c'hoazh gant ar vezh o soñjal en abrantoù he mignonezed o sevel betek o blev fichet diouzh ar c'hiz nevez. Hunvre va nozvezhioù ha pal va deizioù, evel ma lavare hor c'heneil ar *portoriqueño*, a blijte dezhañ distagañ *piropos* a bep seurt d'ar merc'hed ? Tamm ebet. Traoù da stardañ, da waskañ, da voustrañ warno didruez betek ma'z afent da get.

N'eus ket a Dad Nedeleg evit ar preñved boemet gant ar stered. Ha tri bloaz a-c'houde e tro an traoù war an tu gin. Ur *senior* ez eus ac'hanon, ha setu-hi, Korriganez an Erc'h, ur *freshman* a bemzek vloaz, gant un dremm c'hlan hag ur vouezh c'holoet, peadra da lakaat ur paotr da goll e benn. Ebat e vefe panevet d'an tech a zoug ar plac'hig davet ar velldroaderien, ramzed holl anezho. Klaoustreet he deus gant he mignonezed e kavfe beli war bep ezel ar strollad, ha moarvat ez ay ar maout ganti. Ur galon kignet betek ar bev. « Gortozit tri bloaz, hag e c'hoarvezo ur burzhud all, » eme ar c'helenner kozh

en e furnez. « Gant ar spi e c'heller dreistbevañ ». « Met piv a fell dezhañ gortoz tri bloaz all ? » « Ar bloaz a zeu e Jeruzalem ! ». Ar bloaz a zeu ne zeuio biken. Arabat gortoz betek ma lamm al loen ferv. Lakait an hu warnañ. Hogen petra 'dalv treuziñ ha didreuziñ ar strouezh mard eo goulllo ar janglenn ? Petra 'dalv d'ur paotr ober e benn kalet ? N'en deus nemet kemer skouer diouzh e gelenner kozh, a zo aet da glask frealz e palmezennoù Bou Saada, e-touez merc'hed sentus an Oulad Nail. Daoust ha ne vez ket ur plac'h yaouank koulz hag un all, gant ma vez an eil ken koant ha ken ampart hag eben e c'hoarioù ar garantez ? Ur paotr speredek n'emañ ket e blas e-touez an dud barnet *senza speme*, da *vivere in disio*. Ur paotr speredek a rank bezañ evel ur c'hi-red. Lakaat a ra ar gouezaj da spontañ ha da lammat er rouedoù. Neuze e teuio lodenn dennañ al labour : doñvaat al loenig gouez. Kenkoulz e vije klask doñvaat an unkorn. Ha forzh penaos, an doueed ne blij ket dezho an dud ma vez re uhel ar gaoc'henn enno. Degas a reont dezho ar foerell. Ha se 'zo kaoz e tremen an amzer, deiz ha deiz, miz ha miz, bloaz ha bloaz. Ha setu ma rankan kregiñ gant ur bloaz skol all, ken digenvez ha biskoazh.

Litenn a ra, evel ma tere ouzh deroù ar bloaz-skol, an hini diwezhañ kent arnodennoù an aotreegezh. N'eo ket bet aes ober un dibab etre ar c'hentelioù kinniget ar bloaz-mañ. A-benn ar fin em eus lakaet va anv evit pemp rummad a gentelioù : *Märchen und Novelle* ; *Race and Ethnicity in American Literature* ; *Ralph Ellison, William Faulkner, William Kennedy* ; *Maxine Hong Kingston, Toni Morrison, Gloria Naylor, and August Wilson* ; *Literatura y Revolución* : *García Marquez, Cortázar, Paz, Isabel Allende, Fuentes, Neruda, Borges* ; *Greek Drama* : *Aeschylus, Sophocles, Euripides, Aristophanes, and Menander* (*The survival in literary form of primitive ritual ; the development of new mythic patterns on ancient models ; the role of contemporary psychoanalytic theory in evaluating the social function and structure of drama ; the reflection of contemporary social and political issues in drama*). Mont a ran ivez d'ar c'hentelioù diwar-benn ar skrivagnerien rusian harluet. Doare ur *seminar* ez eus gant

ar c'hlas : un daol hir, un dousenn studieren en-dro d'an daol, hag ar c'helenner er penn uhelañ. Ur Russian yaouank ez eus anezhañ, a-vec'h koshoc'h egedomp ha gwisket eveldomp : ur *sweatshirt* ruz-mouk gant ardamez ar skol-veur war e vruched, bragoù chino, ha *sneakers*. « Grit Vadim ac'hanon, » en deus lavaret, ha kroget eo diouzhtu da brezeg diwar-benn Nabokov, a rank bezañ e skrivagner muiañ-karet. Evel-just e rankomp estlammañ dirak ampartiz ar skrivagner. N'eo ket souezh, evit ar pezh a sell ouzh ar saozneg : studiet en doa e skol-veur Cambridge ha gounezet en doa e skrid-testeni gant ar meneg *Honors*. Met gouest e oa d'ober kemend-all gant ar rusianeg, ar galleg, hag an alamaneg. War a hañval e oa bet skeudennet Lolita diwar ur plac'hig en doa graet anaoudegezh ganti e Biarritz, war an draezhenn. He zud a oa tud dister hag amzesk, evel ma tere ouzh bourc'hizien vihan ar broioù-krec'h, met o merc'h ne oa ket evelato : re domm e rede ar gwad en he c'horf gwevn ha skañv. Darbet e oa bet da Nabokov tec'hout ganti, met a-benn ar fin n'en doa ket kredet ober al lamm. Ar plac'hig a oa yaouank-tre (evel dimezelled Hamilton, emichañs), ha kaset e vije bet d'an toull mar bijent bet tapet gant ar archerien. Met ar skrivagner n'en doa ket ankounac'haet : distroet e oa ar plac'hig en e vuhez e stumm ul Lolita, an niñfennig amerikan, saveteet da viken diouzh *meshchanstvo* ha *poshlost'* ar C'hallaoued. Piv nemet ur skrivagner gall en dije gallet kaout abeg e truez ar Slaved ? Ar re-mañ a zamant da blanedenn ur muntrer war e zaoulin dirak ur c'hast. Ar pezh a laka splann spered strizh ur skrivagner gall evel Alphonse Daudet : biken ne c'hallio e faltazi lammat dreist ar roudenn. N'eus anezhañ nemet ur bourc'hiz gall, maget gant tinell dreut Descartes ha Voltaire. Evitañ n'eus nemet ur bugel bazhataet pe ur minorig dilezet a zellez sachañ warnañ truez an dud dereat. Biken ne c'hallio meizañ ar pezh a zo ken anat d'ar Slaved : n'o deus ket truez ouzh an dud reuzeudik, met ouzh ar re villiget, ouzh ar re gollet. Gwir eo, Nabokov ne blij ket dezhañ mennozhioù kilstourm Dostoevsky. Neudenn e romantoù a zo droch, ha distum e zoare-skrivañ. Emañ ar gwir gant Nabokov,

evel-just, met penaos disoñjal ar c'hendivizoù etre ar gwaz ha karedig e wreg, pe an emziviz eus dindan-zouar ? Forzh penaos, n'eo ket un neudenn gorvigellet a zo pal kentañ ar romantour. Ur bed a-bezh an hini eo a fell dezhañ krouiñ : ha setu dres ar pezh a zo bet sevenet gant Dostoevsky. Diaes eo krediñ ne oa nemet abegoù arzel evit kement tra a zo bet tamallet dezhañ gant Nabokov. Hemañ, er c'hontrol, a sav Gogol betek an neñv. Gogol, evel Nabokov, a ra implij eus traoù lu, chin, ha disneuz atav. N'eus netra e romantoù Dostoevsky, na kennebeut en e lizhiri, en e zeizlevrioù, er pezh a zo bet diskuliet diwar e benn, da ziskouez e oa troet da c'hoarzhin goap ouzh techoù pe sioù mab-den. Ne oa anezhañ nemet un *dvor' an' in*. N'en doa ket mignoned e-touez an uhelidi nesañ d'an tsar, ha dont a reas da stultenniñ gant ar *slav'anoph' ilstvo*. Nabokov a zo hêr ar *zapadn' ik' i*. A-vihanik e oa bet sklêrijennet e spered gant sevenadur ar broioù diorroet. Ober a ra ouzh e dudennoù evel ma ra ouzh ar balafenned a zo e albac'henn : gant evezh, estlamm ha karantez, goude ma rankfe lazhañ ha brochañ anezho gant ur spilhenn evit displegañ anezho en ur stalig-wer. Unan eus anvioù Quilty a zo Schmetterling, ha n'eo ket dre zegouezh : bez' ez eus anezhañ unan eus an amprevaned a zeu da zispakañ o divaskell liesliv a-us da flaer ar stronk. Ha perak ne c'hallfe ket an arzour bezañ ken evezhiant ouzh e *Schmetterling* hag ouzh an *Oleander Hawk*, ar *Corsican Swallowtail*, pe an holl valafenned a zarnij e frankizennoù ar Menezioù Roc'hellek ? An amzer a chom a-sav, ha bolz an oabl, pa vez skoet outi gant ur wialenn-hud, a son evel gwer-strink, ha Lolita eo an hini gaerañ e-touez an holl valafenned.

Plijus-tre eo bet ar gentel, ha plijusoc'h c'hoazh ar studierez a oa azezet en tu all d'an daol. Un anv iskis he deus, Ragnar Egilsdóttir ma'm eus komprenet mat. Dougen a ra he flezhennoù alaouret evel ur gurunenn. Pennroueelezh ar veleganez he daoulagad c'hlas evel morioù an hanternoz, ha risklusoc'h eget ar mor, moarvat. He mousc'hoarzh ha birvilh he daoulagad o deus lakaet an eurvezhiad da dremen ken buan ha red ar froud. Er sizhunioù a zeu, 'm eus aon,

e vo gouestlet al lodenn vrasañ eus va amzer da levrioù Nabokov.

Rusia da vare ar brezel diabarzh a rank bezañ bet ur vro iskis, spontus, ha burzhudus, evel m'eo skeudennet e *Konarm'ya* Babel e *Rastrachik' i Kata'ev*, e *Golyi God* Piln'ak, hag e *Razgrom* Fad'e'ev. Evel-just, ne oa ket ar Volcheviked evit reiñ o asant d'un turmud ken berv. Panevet d'o sotoni e vije deuet Rusia da gemer ur plas a enor war leurenn al lennegezh. N'eus nemet gwelout ar pezh a zo c'hoarvezet gant Aragon en e *Roman inachevé* : ar paourkaezh barzh a zo bet beziet don e karc'har Marks ha Lenin. Ur wech dre vare marteze e c'hoarvez gant an hudour kozh sevel e benn ha spurmantet e vez beg e dog e-keit ha ma tistilh e strobinoù e-touez ar robotoù digred gant o maskloù damwenn, ar *sitzriesen* emgaeliet en o c'hazarnioù simant gwalc'het bemdez gant laezh ter fav put. Dinerzh e vez ar strobinoù, hag a-benn emberr en em gav ar paourkaezh achantour ledet divuhez ha didok dindan ur mell maen-ben.

Ragnar a zeuio ganin d'ar c'hoariva. Un digarez am eus bet evit pediñ anezhi : ur strollad gall a ra un droiad dre ar Stadoù-Unanet. Du-mañ ne vo nemet div abadenn : *Britannicus* disadorn d'an noz, ha *Le Cid* disul goude lein. Mat eo bet o dibab, evit ar pezh a sell ouzh an arc'hant : mod-se ez int sur e vo leun ar c'hoariva. Pep kelenner war ar galleg er skolioù tro-dro a gaso e studieren, ha gwa d'an neb na vo ket evit displegañ e vennozh diwar-benn an abadennoù pa vo goulennataet dilun er skol. Asantet he deus diouzhtu. Hunvreet em eus diwar he fenn, hag an hunvre en deus devet un toull e steuenn va c'houisk. Emañ o chom e kendi ar studierezed, met kejet em eus ganti er *Borderland* evit debriñ labous-yar rostet er c'hiz Cajun a-raok an abadenn. Agrippine a zo kozh, kabac'h pe dost. N'eo ket barrek ken da veizañ ar pezh a zo e kalon he mab. Lakaat a ra he fiziañs en he galloud gwechall, ur galloud kollet ganti abaoe pell 'zo. Narcisse, ur sarpant binimus anezhañ, an droug digemmesk ennañ. Burrhus, ur soudard a denn d'ur manac'h gant e zoneg burell. Neron : ar c'hoarier a ro dezhañ neuz ur c'hrennbaotr koshaet, gwan, dic'houest da sevel a-enep e vamm, ha prest atav da sentiñ ouzh an hini en

deus komzet gantañ da ziwezhañ. Bez' ez eus un diviz fentus pa zeu Agrippine, Burrhus ha Narcisse da vezañ mestr warnañ pep hini d'e dro. Servijout a ra a-nevez da Narcisse ar pezh a zo bet bouetet dezhañ gant Burrhus. Narcisse ne vo ket pell da lakaat anezhañ da dreñ, splann eo. Britannicus ha Junie n'o deus ket kalz d'ober. Junie dreist-holl a zo an oan prest evit an aberzh, ar pezh a voe diskouezet splann pa voe kroget enni gant gwarded Neron ken rust ma voe hanter ziframmet he sae : moarvat e felle d'al leurenner reiñ un tammig *strip-tease* d'an arvesterien, ar pezh a zere ouzh spered sadek Racine, forzh penaos. Aet on gant Ragnar betek he c'hendi. Ne felle ket dezhi mont d'ar Regatta-bar : re ziwezhat e oa. Ret e vo din tremen gant ar skeudennoù ijinet em spered, ha soñjal en he dargreiz moan hag en he divronn dizoloet evel bruched Junie. Faltazioù diwar ar c'hoant, skeudennoù aner, melezhour ar galon.

Disul vintin em eus kejet ganti dirak ar Coop. Touet em boa e kavfe mat ar *brunch* e ti-debriñ *Friday's*, hag e talvezfe ar boan mont di gant ar metro. Ne voe ket kerse ganti : ar galfrez a strake dindan hon dent, un drugar. An abadenn, a-enep, a zo bet dipitus : un Don Diègue unton, ur Rodrigue siferniet, ur Chimère disaour, un Don Sanche divlaz. Ar roue ne oa ket fall : un den a youl vat, sammet e spered gant bec'h e zlead, ur melestrour kentoc'h eget ur roue-meur. Ne oa nemet an *Infante* hag en em zalc'he evel ur vaouez a ouenn uhel, reut he c'horf inkazet en he sae reut, reut he gouzoug e-kreiz dantelez he frezenn reut, ken reut ha dezveg al lezennoù a ren he buhez.

Va *C'hondo* a zo damdost da c'hoariva ar skol-veur, hag aet omp da evañ ur bannac'h gwin Jerez. Eus pondalez ar prenestr ec'h astenn ar gwel dreist ar stêr hag ar porzh, betek ar mor hag an inizi. Displeget em eus da Ragnar istor lestr melen glas Nabokov. Argaset e oa bet diouzh Rusia gant trec'h ar Volcheviked, hag argaset e oa bet adarre diouzh Europa gant trec'h an Nazied. Pa zegouezhas er Stadoù-Unanet ez eas da gelenner war ar rusianeg evit gounit e damm bara. Doareoù-skoliata dibar a veze gantañ evit deskiñ d'e

studierien distagadur ar yezh : e Rusia, mar fell deoc'h ober al lez d'ur plac'h yaouank, distagit fraezh *yellow blue vase*. Klevout a ray *Ya l' oubl' ou vas*, ha mod-se e vo renket an afer. Sellet em eus ouzh Ragnar, ha lavaret am eus goustadik : *yellow blue vase*. Tostaet he deus ouzhin, hag he c'horf a deuze etre va divrec'h evel ma ra hini ur plac'h yaouank war-nes en em reiñ, ha levenez ar garantez a zo bet deomp.

« Ar skrivagnerezh, » eme Nabokov, « a zo un arz-hud, ur c'hoari ma vez kemmesket enni an achanterezh hag an touellerezh. » Met pa gouezh ar bluenn diouzh dorn ar skrivagner e stok al lestr melen glas ouzh maen ar boud. *Zashchita Luzhina, Otchajanje, Priglashenje na kaznj* : gwellañ difenn an arz ne dalvez da netra a-enep an dic'hoanag pe ur c'hemenn d'un dibennadur. Va-unan e oan er *Borderland*, va-unan e oan e *Friday's*, va-unan e oan er c'hoariva, ar gwele a zo chomet goull, ha Ragnar, evel m'he deus disklêriet krenn-ha-krak war ar pellgomz, a zo mestrez Vadim. Da zerc'hent e emlzh e skriv Mayakovsky ar gerioù mantrus : « *Ljoubovnaja lodka razbilasj o byt* », lestr ar garantez a fregas ouzh ar boud. Va lestr melen glas n'eo ket deuet da vezout zoken.

E frazenn Mayakovsky e talvez « byt » « gwirvoud » , « traelezh » evit ar vredelfennerien.